

KAIEROU

KENVREURIEZ AR BREZONEG

\*\*\*\*\*

KAIER N° XII

Goueliou ha Suliou miz Genver

\*\*\*\*\*

Cahiers non périodiques. Souscription pour 500 pages: 12 F.

C.C.P. 193.17 Nantes, Chanoine Nédélec (Ker-Anna, 29 S Quimper).

La seconde série a commencé avec le N° XI.

\*\*\*\*\*

TAOLENN AR HAIER N° XII

SKRITUR ZAKR EN OVERENN hag OREZONOU evid Miz Genver 1971

|                                                           |       |
|-----------------------------------------------------------|-------|
| Gouel an Itron Varia Mamm da Zoue (1a a viz genver)       | 39-41 |
| Eil sul goude Nedeleg . . . . .                           | 42-45 |
| Gouel an Epifani, anvet c'hoaz Gouel ar Rouaned . . . . . | 46-49 |
| Gouel Badiziant Or Zalver . . . . .                       | 50-53 |
| Eil Sul ordinal, bloavez C . . . . .                      | 54-57 |
| Trede Sul ordinal . . . . .                               | 58-63 |
| Pevare Sul ordinal . . . . .                              | 64-68 |
| Pemped Sul ordinal . . . . .                              | 69-73 |

\*\*\*\*\*  
Troidigeziou aotreet da arnod, evid an eskopti,  
a-berz an Aotrou F. Barbu, Eskob Kemper ha Leon.

Kemper, d'an 9 a viz kerzu 1970.

+ V. Fave, eskob-skoazeller.

\*\*\*\*\*  
N.B.- Prest e oa ganeom notadennoù da zisplega an dibab on eus grêt, en  
arroudou 'zo, etre liez doare da drei e brezoneg. Kerse eo chom berr d'o  
lekaad an taol-mañ, rag tro a gavo ganto or henlabourerien da rei o ali.

GOUEL AN ITRON VARIA MAMM DOUE / - Deiz kenta a viz Genver -

Lennadenn Ia. - Er bedenn lavaret gand beleien Israel war ar  
bobl, ez eus evidom ive hetou a vuez eüruz.

PENNAD EUZ LEVR AN NIVEROU (6/22-27)

22. Komzet e-neus an Aotrou Doue da Voizez evelhénn:
23. "Lavar d'Aaron, ar beleg, ha d'e vibien:  
Evid benniga bugale Israel, c'hwi a lavaro dezo:
24. An Aotrou Doue ho pennigo hag hi tiwallo!
25. Ra blijo gand an Aotrou Doue diskouez deoh dremm (pe: bizaj) laouen,  
ha mired deoh e vadelez!
26. Ra blijo gand an Aotrou Doue trei e zremm ouz ho tu,  
hag ho lakaad da veva er peoh!
27. Evelse e lavaro ar veleien va ano war vugale Israel,  
din d'o benniga.

\*\*\*\*\*

(ton: Eüruz an hini)

SALM 66 / 2-3, 5, 6 & 8.- Diskan: Kemerit truez ouz ho pugale,  
..... Roit ho pennoz deom, Aotrou Doue!

2. Plijet gand Doue skuill warnom e drugarez hag e vennoz,  
plijet gantañ diskouez deom dremm (pe: bizaj) laouen.
3. evid ma vo anavezet dre an douar a-bez ho lezenn zantel,  
hag e-touez an oll boblou ho silvidigez.

5. Joa ha levez d'an oll boblou, rag c'hwi 'zo just o houarn ar bed,  
c'hwi 'zo reiz o ren ar poblou,  
hag ouz o heñcha war an douar-mañ.
6. Bezit meulet, o Doue, gand poblou ar bed!  
Ya, meuleudi deoh gand an oll boblou!
8. Doue d'or benniga, ha da veza doujet dre an douar a-bez.

\*\*\*\*\*

Eil Lennadenn.- Dre an Itron Varia eo deut Mab Doue da  
veza mab-dén, evid ober ahanom bugale da Zoue.

PENNAD EUZ LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN BRO-HALL AZIA (4/4-7)

4. Pa 'z eo bet peurechu an amzer merket, Doue e-neus kaset e Vab,  
a zo en em hrêt mab d'eur vaouez, e-neus pleget d'al Lezenn,
5. evid dasprena an dud a oa dindan yeo al lezenn,  
evid ma vefem kemeret da vugale gand Doue.
6. O veza ma'z oh e vugale, e-neus Doue digaset en ho kalonou  
Spered e Vab, a zo o krial: "Abba! Tad!"
7. Ha setu n'out ket mui servicher (pe: mevel), med mab dezañ,  
hag o veza mab, ez out heritour ive, dre hras Doue.

\*\*\*\*\*

ALLELUIA.- D'on tadou gwechall e komze Doue dre ar brofeted,  
bremañ eo deut da gomz deom dre e Vab. - Alleluia!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (2/15-21)

15. Goude ma oa tehet an Elez diwar o zro, ar bastored a gomze kenetrezo:  
"Deom beteg Betleem, da weled ar pezh a zo c'hoarvezet,  
ar pezh a zo bet diskleriet deom gand an Aotrou."
16. Mond a reont buan, hag e kavont Mari ha Jozef,  
hag ar hrouadur gourvezet er hraou.
17. Goude beza gwelet, e reont da houzoud  
ar pezh a oa bet lavaret dezo diwarbenn ar hrouadur-se.
18. Ha kement hini a gleve a oa souezet  
gand ar pezh a gonte dezo ar bastored.
19. Edo Mari o telher mad an oll draou-se en he halon,  
hag o sonjal enno.
20. Ar bastored, en eur vond kuit, a rente gloar ha meuleudi da Zoue,  
evid kement o doa klevet ha gwelet, hervez ma oa bet lavaret dezo.
21. Tremenet an eisteiz, e tlee ar hrouadur beza trodrohet (pe: sirkonsizet),  
ha neuze eo bet anvet Jezuz,  
ano bet roet dezañ gand an êl araog ma oa bet konsevet.

\*\*\*\*\* OREZONOU GOUEL MAMM DOUE \*\*\*\*\*

- 1) Aotrou Doue, dre ar Werhez Vari deut da veza mamm  
ho peus roet da ouenn an dud gras ar zilvidigez peurbaduz;  
grit ma santim anezi oh alvokadi evidom, hi hag on eus resevet dreizi  
Krouer ar vuez: Jezuz Krist, ho Mab on Aotrou, Doue beo ganeoh...
- 2) Aotrou Doue, ganeoh en ho madelez e vez boulhet ha peurechuet peb tra vad;  
ni ho ped eta, p'emaom er joa gand gouel Mamm Doue:  
koulz ha m'om laouen gand ho kras en he donezonou kenta,  
grit ma vim eüruz pa vleunio en he haerra. Dre Jezuz Krist, or Zalver.
- 3) Laouen om, Aotrou Doue, o veza resevet ar zakramant euz an neñv;  
grit, ni ho ped, ma tougo frouez ennom evid ar vuez peurbaduz,  
ni hag a blij ganeom diskleria en or feiz ez eo ar Werhez Vari  
Mamm d'ar Zalver. ho Mab ha Mamm d'ar Zalver.

EIL SUL GOUDE NEDELEG

(Ar zulvez-mañ, etre an 2 hag ar 5 a viz genver,  
a lez e blas gand gouel an Epifani, er broiou  
ma n'eo mui an Epifani eur gouel-berz.)

Lennadenn Ia. - Furnez Doue - hag e Vab ez eo - a zo deut  
da veva e-touez an dud.

PENNAD EUZ LEVR AR FURNEZ GAND MAB-SIRAH (greg. 1-2, 8-12)

1. Setu Furnez Doue o kana he meuleudi heh-unan,  
oh embann he gloar e-kreiz he fobl;
2. Dirag pobl an Doue mestr d'an neñvou, eo staget da gomz,  
dirag an hini oll-halloudeg e tispieg he gloar heh-unan.
8. Krouer ar bed e-neus roet urz din,  
an hini e-neus va hrouet e-neus merket din e peleh ober va annez.  
(pe: ober va jomaj, pe: mond da veva)  
Lavaret e-neus din: "E-touez bugale Jakob eo dit ober da annez,  
e pobl Israel eo dit kaoud da heritaj."
9. A oll viskoaz, araog peb tra, on bet krouet gantañ,  
ha beteg fin ar hantvejou, da viken, e chomin beo.
10. En e di santel am eus grêt dirazañ labour va harg,  
hag evelse e kêr Zion on deut da jom evid mad.
11. En e gêr muia karet am eus kavet an diskuiz,  
e Jeruzalem emañ kalon va rouantelez.
12. Gwrizioù am eus grêt e-kreiz ar bobl karget a enor,  
e tachenn an Aotrou Doue, en e lod heritaj;  
beva e-touez e dud santel eo va dudi.

\*\*\*\*\*

SALM 147 / 12-13, 14-15, 19-20.-

Diskan: Mab Doue 'zo en me hrêt den, alleluia;  
..... E-touez an dud e-neus bevet, alleluia.

12. Meulit an Aotrou Doue, Jeruzalem; meulit ho Toue, kêr Zion.
13. Rag gantañ eo bet kreñveet prenn ho toriou,  
hag e vennoz a ro d'ho pugale en ho kreiz.
14. Mired a ra ar peoh war harzou ho touar,  
ho maga 'ra gand bleud flour ar gwiniz.
15. Kas a ra e gomz war an douar, ha gand tiz e red e lavar.
19. E gomz a ro da anaoud da Jakob,  
e lezenn ha menozioù e volonteiz da Israel;
20. Evid pobl ebed n'e-neus grêt kement-se,  
n'e-neus ket dizoloet dezo menozioù e volonteiz.

\*\*\*\*\*

Eil Lennadenn. - A viskoaz om dibabet gand Doue evid beza grêt  
e vugale a-unan gand e Vab unganet. Pebez karantez!

PENNAD EUZ LISER SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-EFEZ (1/3-6, 15-18)

3. Meulet ra vo Doue, Tad Jezuz Krist, on Aotrou!  
Euz lein an neñv, e-neus karget ahanom  
a beb seurd bennozioù speredel én Aotrou Krist.
4. Er Zalver-se e-noa choazet ahanom a-barz ma oa krouet ar bed,  
evid beza santel ha dinamm dirazañ, er garantez.
5. Divizet e-noa a viskoaz ober ahanom e vugale,  
dre Jezuz Krist hag evid beza unanet gantañ,  
ha kement-se hervez m'eo bet plijet gand e vadelez,

6. evid rei tro da veuli splannder ar hras dispar  
e-neus roet deom, dre garantez nemedkén, én e Vab karet.
15. O veza klevet komz euz ho feiz er Zalver Jezuz,  
hag euz ho karantez e-keñver an oll gristenien,
16. ne baouezan ket (pe: emañ heb ehan o tr.) da drugarekaad Doue  
diwar ho penn, pa ran meneg (pe ano) ahanoh em fedennou.
17. da houlenn ma plijo gand Doue Or Zalver Jezuz Krist,  
an Tad a zo dezañ peb gloar,  
rei deoh eur spered a furnez hag a sklerijenn,  
evid kaoud gwir anaoudegez anezañ.
18. Plijet gantañ sklerijenna daoulagad ho kalon,  
deoh da houzoud da bebez esperans e-neus ho kalvet,  
ha pebez teñzor a hloar a roio deoh da heritaj e-touez ar zent.

\*\*\*\*\*

ALLELUIA.- Meuleudi deoh, Aotrou Krist,  
skignet ar feiz ennoh a-dreuz ar bed. Alleluia.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (1/1-18, a heller diverra  
en eur lenn 1-5 ha 9-14.

\*\*\* Gwelit an Aviel-mañ én overenn an deiz da houel Nedeleg,  
kaier n° XI, p.29.

\*\*\*\*\*

OREZONOU AN EIL SUL GOUDE NEDELEG

PEDENN AN DIGOR.- Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha peurbadel, splannder an eneoù o deus ar feiz,  
plijet ganeoh, en ho madelez, karga ar bed euz ho kloar,  
hag en em ziskouez d'an oll boblou dre ar sked euz ho sklerijenn.  
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,\*  
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.

WAR AR PROVOU.-

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, santellaad ar brovadenn a ginnigom  
da geñver ginivelez ho Mab unganet,  
a zo ganti diskouezet deom hent ar wirionez,  
ha prometet buez rouantelez an neñv. Dre Jezuz Krist, or Zalver.

GOUDE KOMUNIA.- Pedom oll a-unan...

Aotrou Doue, a greiz kalon e houlennom diganeoh  
ma vim, dre vertuz an overenn-mañ,  
gwalhet euz or pehejou ha pareet euz on techou fall,  
ha ma vo roet deom or goulennou pa 'z int hervez ho polontez.  
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

\*\*\*\* Testenn latin \*\*\*\*

- 1) Omnipotens sempiterne Deus, fidelium splendor animarum, dignare mundum  
gloria tua implere benignus, & cunctis populis appare per tui luminis  
claritatem.
- 2) Oblata, Domine, munera Unigeniti tui nativitate sanctifica, qua nobis  
et via veritatis ostenditur, et regni caelestis vita promittitur.
- 3) Domine Deus noster, suppliciter te rogamus, ut, hujus operatione mysterii,  
vitia nostra purgentur, et justa desideria compleantur.

8 GOUEL AN EPIFANI / - muioh anavezet dindan ano "Gouel ar Rouaned" -

Lennadenn Ia. - Ar profed a wel an dud euz an oll vroioù  
o tîredeg da gêr Jeruzalem, kêr zantel Doue hag e bobl.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED IZAIAS (60/1-6)

1. Savit, leun a sked, Jeruzalem! Rag emañ ho sklerijenn o tond,  
ha gloar an Aotrou Doue o para warnoh.
2. P'emañ beuzet an douar en deñvalijenn, hag ar poblou en noz du,  
warnoh emañ an Aotrou par d'an heol o sevel,  
hag e hloar a weler ennoh.
3. Poblou ar bed a gerzo 'trezeg ho sklerijenn,  
ar rouaned warzu ho sked lugernuz.
4. Savit ho taoulagad ha sellit tro-war-dro:  
en em voda 'reont oll, hag emaint o tond d'ho kaoud;  
euz a bell e teu ho paotred,  
hag ho merhed ive, douget war ar vreh.
5. Sellit mad, ha bezit leun a levez,ez,  
lezit ho kalon da lammad ha da dridal, p'emañ o tond davedoh  
pinvidigez broioù ar mor ha teñzorioù ar poblou.
6. Goloet e viot gand kañvaled e-leiz hag o loened yaouank,  
euz broioù Madian hag Efa;  
oll an dud euz Bro-Zaba a zeuio,  
aour hag ezañs leiz o daouarn, meuleudi d'an Aotrou leiz o ginou.

\*\*\*\*\*

SALM 71 / 2, 7-8, 10-11, 12-13 - Diskan: Enor ha gloar da Vab Doue:  
..... Or Zalver eo hag or Roue;  
Ni e garo 'pad or bue(z).

\*\*\* Ton el levr Kantikou n° 50, pe n° 76.

2. Aotrou Doue, roit ho kalloud d'ar roue,  
hag ho furnez dezañ, mab d'ar roue,  
ma ouio beza just o rén ho pobl,  
ha kemer soursi euz ar re baour, ho tud fidel.
7. En e amzer, e vleunio ar justis, hag e vo peoh frouezuz,  
beteg ma ne baro mui al loar.
8. Mestr e vo euz an eil mor d'egile,  
azaleg ar Ster vraz beteg pennou pella ar bed.
10. Rouaned Bro-Darsiz hag an inizi a baeo taillou dezañ,  
rouaned Saba a zigaso provou.
11. Stoui ray dirazañ oll rouaned ar bed, an oll boblou a blego dezañ.
12. Divehia 'ray ar paour a zav e vouez da glemm,  
hag ar paour-kêz a zo heb skoazell.
13. Truez e-no ouz an den dister hag an hini dibourvez,  
savetei a ray o buez d'ar re baour.

\*\*\*\*\*

Eil Lennadenn. - An abostol e-neus mall da rei d'anaoud mister  
brza karantez Doue: e volentez da helver an oll dud.

PENNAD EUZ LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-EFEZ (3/2-3, 5-6)

2. Anaoud a rit, va breudeur, ar hras a zo bet roet din evidoh a-berz Doue,
3. penaoz eo bet dizoloet din e venoz kuz diwarbenn an Aotrou Krist.
5. N'eo ket bet diskuliet d'an dud en amzerioù tremenet,  
evel m'eo bet diskuliet bremañ dre ar Spered  
d'e ebestel ha d'e brofeted santel:
6. dre an Aviel, eo deut ar bayaned da gaoud lod er memez heritaj,  
da veza izili euz ar memez korv, ha lodeg er bromesa grêt gand Doue  
en Aotrou Krist.

ALLELUIA.- E steredenn on eus gwelet er zav-heol,  
hag ez om deut gand or provou d'adori on Aotrou.- Alleluia.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT VAZE. (2/1-12)

1. Goude m'eo bet ganet Jezuz e Betleem Juda, en amzer ar roue Herodez,  
ez eus deuet Majed euz bro ar zav-heol da Jeruzalem,
2. hag e lavarent: "E peleh emañ roue ar Juzevien nevez-ganet?  
Rag gwelet on eus e steredenn e bro ar zav-heol,  
ha deut om d'e adori."
3. O klevet kement-se, ar roue Herodez a zo strafuillet,  
hag ivez kêr Jeruzalem a-bez.
4. Bodet gantân oll bennou braz ar veleien ha skribed ar bobl,  
e houlenn diganto e peleh e tle ar Mesiaz dond er bed.  
Respont a reont dezañ:
5. "E Betleem Juda, rag evelhénn eo skrivet gand ar profed:
6. Ha te, Betleem, douar Juda,  
n'out ket an disterra e-touez kêriou Juda,  
rag ahanout e teuo an hini a vo pastor va fobl Israel."
7. Neuze Herodez, goude beza galvet ar Vajed dre guz,  
a lak e boan da houzoud diganto ar mare resis (pe: dres ar mare)  
m'eo bet paret ar steredenn d'o daoulagad;
8. hag, en eur gas anezo da Vetleem, e lavar:  
"It, ha grit enklask piz diwarbenn ar bugel;  
ha, pa vo bet kavet ganeoh, digasit kelou din,  
evid ma 'z in, me ivez, da stoui dirazañ."
9. Goude beza selaouet ar roue, ar Vajed a ya en hent.  
Ha setu o vond dirazo ar steredenn o deus gwelet er zav-heol,  
ha chom a ra a-zav a-uz d'al leh m'emañ ar bugel.

10. O weled ar steredenn, o deus bet joa vraz kenañ.
11. Eet e-barz an ti, e kavont ar bugel gand Mari, e vamm,  
hag e stouont dirazañ;  
dispaka a reont an teñzoriou a zo ganto,  
hag e kinnigont dezañ aour, ezañs ha mir.
12. Goudeze, alïet dre o kousk da jom heb distrei da gaoud Herodez,  
e kemeront eun hent all evid mond d'ar gêr en o bro.

\*\*\*\*\* OREZONOU GOUEL AN EPIFANI \*\*\*\*\*

PEDENN AN DIGOR.- Pedom Doue...

Aotrou Doue, da geñver an deiz-mañ ho peus, dre ar steredenn,  
roet da anaoud ho Mab unganet d'ar poblou payan;  
roit deom ar hras, ni hag a anavez ahanoh bremañ dre ar feiz,  
da vond eun deiz d'ho kweled dizolo e splannder ho kloar.  
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,\* Doue beo ganeoh ha...

WAR AR PROVOU.- Sellit gand madelez, Aotrou Doue, ouz provou hoh Iliz:  
n'eo ket mui aour, ezañs na mir on eus da ginnig,  
med an Hini a oa skeudennet ganto, bremañ roet deoh e sakrifis  
ha roet deom d'or maga, Jezuz Krist, or Zalver.- R/. Amen.

GOUDE KOMUNIA.- Pedom oll a-unan...

Ho pedi a reom, Aotrou Doue:  
lakit eur sklerijenn euz an neñv da bara dirazom bepred hag e peb leh,  
evid ma tigoror or spered da anaoud ervad Sakramant an aoter,  
ho peus roet deom perz ennañ,  
ha ma vo gwir garantez en or halon ouz e reseo.  
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

/ GOUEL BADIZIANT OR ZALVER / (d'ar zul goude ar 6 a viz genver, nemed pa vez bet grêt an Epifani d'ar 7 pe d'an 8.)

Lennadenn Ia. - Servicher an Aotrou Doue eo ar Zalver,  
sakrèt evid embann ar zilvidigez d'an oll dud.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED IZAIAS (42/1-4, 6-7)

1. Setu va zervicher, a roan harp dezañ,  
an den dibabet ganin, a gavan va dudi ennañ.  
Laket am eus va spered da ziskenn warnañ,  
d'ar poblou payan eñ a roio da anaoud ar wir relijion.
2. Ne hopo ket, ne zavo ket uhel e vouez,  
ne vo ket klevet war ar blasenn.
3. Ne 'flastro ket eur gorzenn dorret,  
ne lazo ket ar goulou dare da vervel  
(pe: ne vougo ket eur houlaouenn eet bian);  
gand lealded e tisklerio ar wir relijion.
4. Ne 'fallaio ket, ne blego ket,  
kén n'e-no diazezet ar wir relijion war an douar,  
mall gand poblou an inizi pella deski gantañ al lezenn.
6. Me, an Aotrou Doue, am eus galvet ahanout  
evid seveni va menoziou a zilvidigez,  
kroget am eus en da zorn, da ziwallet am eus,  
ha da laket evid beza emgleo va fobl  
ha sklerijenn ar broadou payan,
7. evid digeri o daoulagad d'ar re zall, dijadenna ar brizonerien  
ha tenna euz an toull-bah ar re a vev en deñvalijenn.

\*\*\*\*\*

SALM 28 / 1-2, 3ac-4, 3b-9c-10.

Diskan: An Aotrou Doue a skuill e vennoz war e bobl,  
..... hag a ro dezi ar peoh.

1. Dougit d'an Aotrou Doue, c'hwi bugale Doue,  
dougit d'an Aotrou gloar hag enor.
2. Dougit d'an Aotrou peb gloar dleet d'e ano,  
stouit dirag an Aotrou, en ho kaerra dillad.
3. Mouez an Aotrou a-uz d'ar mor: emañ an Aotrou a-uz d'an doureier braz.
4. Mouez an Aotrou a darz gand nerz, mouez an Aotrou e-kreiz ar splannder.
- 3b. An Doue uhel-meurbed a lak ar gurun da drouzal;
- 9c. En e di santel emañ an oll o lavared: Gloar!
10. A-zioh an dour-beuz edo an Aotrou azezet war e gador;  
emañ an Aotrou Doue war e gador, roue da viken.

\*\*\*\*\*

Eil Lennadenn. - An abostol sant Per a zo e ti eun  
ofiser roman, e-neus e halvet da zond. Displega  
a ra penaoz eo bet boulhet labour ar zilvidigez  
dre ar vadiziant roet gand Yann Vadezour.

PENNAUD EUZ LEVR OBEROU AN EBESTEL (10/34-38)

34. E ti an ofiser Korneli, Per a zo kroget da gomz:  
"E gwirionez, emezañ, kompren a ran  
ne ra ket Doue gwelloc'h stad euz tud 'zo;
35. er hontrol, e kement gouenn pe bobl a zo,  
an dud a zouj anezañ hag a zo reiz o buez a blij dezañ.
36. Digaset e-neus e gomz da vugale Israel, gand kelou mad ar peoh  
dre Jezuz Krist: hemañ 'zo Aotrou war an oll dud.

37. Gouzoud a rit, c'hwi, ar pezh 'zo bet c'hoarvezet e Bro-Judea a-bez;  
boulhet eo bet an traou e Bro-Halilea,  
war-lerh ar vadiziant embannet gand Yann.
38. Jezuz a Nazared e-neus Doue sakret anezañ,  
o rei dezañ ar Spered Santel hag e halloud.  
Tremenet eo e peb leh en eur ober vad  
hag en eur barea kement hini a oa gwasket gand an diaoul.  
Rag Doue a oa gantañ.

\*\*\*\*\*

ALLELUIA.- Euz an neñvou digor eo bet klevet mouez an Tad o tiskenn:  
Setu va Mab, va muia karet; selaouit outañ.- Alleluia.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (3/15-16, 21-22)

15. En amzer-se, ar bobl diredet daved Yann Vadezour a oa war hed,  
hag oll en em houlennent outo o-unan  
daoust ha ne vefe ket Yann ar Zalver (pe: Mesiaz).
16. Yann, neuze, a lavare d'an oll:  
"Me eo gand dour e vadezan ahanoh,  
med emañ o tond an hini 'zo kreñvoh egedon,  
ha n'on ket din da ziskoulma lerenn e zandalennou:  
eñ ho padezo er Spered Santel hag en tan."
21. Eun deiz, pa oa echuet da vadezi an oll,  
Jezuz, bet badezet ive, a oa o pedi,  
ha setu an neñv o tigeri.
22. Diskenn a ra ar Spered Santel warnañ,  
dezañ, da weled, stumm (pe: furm) eur goulm,  
hag e klever eur vouez euz an neñv o lavared:

"C'hwi 'zo va Mab muia karet,  
ennoh e kavan va dudi."(pe: ennoh e vouran.)

\*\*\* Hervez dornskridou 'zo, an diou linenn diweza a vefe:

"C'hwi 'zo Mab din,

digandin hirio ho peus bet ar vuez."

\*\*\*\*\* OREZONOU GOUEL BADIZIANT OR ZALVER \*\*\*\*\*

PEDENN AN DIGOR.- (Da zibab a zo etre an diou-mañ:)

- 1) Doue oll-halloudeg ha peurbadel, epad ma tiskenne ar Spered Santel  
war Or Zalver Jezuz Krist, badezet er ster Jordan,  
ho peus-c'hwi diskleriet e oa eñ ho Mab karet;\*  
ni ho ped, evid an dud ho peus kemeret da vugale  
pa 'z int bet ganet a nevez dre an dour hag ar Spered Santel,  
ma talhint, heb koueza morse, da heulia ho polontez 'hed o buez.  
Der Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,\* Doue beo ganeoh...

- pe 2) Aotrou Doue, c'hwi hag a zo deut ho Mab karet  
d'en em ziskouez d'an dud gand eur horv evel on hini,  
grit ma vim renevezet en on diabarz  
gand an hini on eus anavezet heñvel ouzom en diavêz:  
Eñ or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,\* Doue beo...

WAR AR PROVOU.- Plijet ganeoh, Aotrou Doue, kemer ar provou a zigasom deoh  
da geñver an deiz m'ho peus diskouezet deom Jezuz evel ho Mab karet;  
grit ma teuo provadenn ho tud fidel da veza skrifis ar memez Jezuz,  
a zo fellet gantañ, en e drugarez, gwalhi pehejou ar bed. Eñ on Doue..

GOUDE KOMUNIA.- Maget gand ar zakramant santel, e pedom c'hoaz ho madelez,  
Aotrou Doue:\* en eur zelaou gand feiz ho Mab unganet,  
grit ma vim anvet, ha ma vim e wgirionez ho vugale. Dre J.K.O.Z.

EIL SUL ORDINAL

Lennadenn Ia.- Araog an Aviel, a ziskouezo Jezuz o kemer perz  
e gouel eun eured, klevom ar profed o kana ar garantez  
a bried e-neus Doue evid ar bobl dibabet gantañ.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED IZATAZ (62/1-5)

1. Dre garantez evid Sion, ne jomin ket dilavar;  
dre garantez evid Jeruzalem, n'am-mo ket ehan,  
kén na skedo he justis evel ar goulou-deiz,  
hag he zilvidigez par d'eun eteo tanflammet.
2. Ar broiou payan a welo da justis, hag an oll rouaned da hloar;  
eun ano nevez a vo roet dit diwar muzellou an Aotrou.
3. Bez' e vi eur gurunenn skeduz e dorn an Aotrou,  
eur zeizenn-roue e dorn da Zoue.
4. Ne vi ket anvet mui "an hini dilezet", na da vro "an hini houllou";  
anvet e vi "va flijadur enni", ha da vro "an hini eureujet";  
rag an Aotrou a gavo e blijadur ennout, ha da vro he do eur pried.
5. Ya, evel eur paotr o timezi d'eur plah yaouank,  
an hini e-no da zavet a gemero ahanout da bried;  
hag, evel m'e-neus eun den nevez levenez gand e bried,  
da Zoue e-no levenez ganit.

\*\*\*\*\*

SALM 95 / 1-2a, 2b-3, 7-8a, 9-10ac

Diskan: Grit brud, e-touez an oll boblou,  
..... d'an traou kaer 'neus grêt Doue.

1. Savit d'an Aotrou Doue eur han nevez,  
Meulit an Aotrou dre bevar horn ar bed,
- 2a. Roit meuleudi d'an Aotrou, ha mil bennoz d'e ano.

- 2b. Bemdez, roit da anaoud e zilvidigez;
3. Grit brud d'e hloar e-touez broadou an douar,  
d'an oll boblou displegit e vurzudou.
7. Dougit 'ta, broadou a beb gouenn, dougit d'an Aotrou gloar ha galloud;
- 8a. dougit d'an Aotrou an enor dleet d'e ano.
9. Deuit, gand ho kwiskamanchou sakr, d'adori an Aotrou;  
krenit dirazañ gand doujañs, tud an douar a-bez.
10. It da lavared d'ar broadou: Roue eo an Aotrou Doue!  
Gouarn a ra an oll boblou hervez e justis.

\*\*\*\*\*

Eil Lennadenn.- Eur gentel a bouez on eus bremañ digand sant  
Paol diwar-benn an donezonou liez-seurd roet gand Doue  
d'an dud, da bep hini e lod.

KENTA

PENNAD EUZ LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-GORINT (12/4-11)

4. Liez seurd donezonou a ro Doue, oh ingala anezo etre an dud,  
med ar memez Spered eo;
5. Liez karg disheñvel a zo ivez en Iliz, med ar memez Aotrou Krist eo,
6. ha liez seurd oberou, med ar memez Doue o labourad atao e peb den.
7. Evid mad an oll e vez roet da bep hini e zonezon  
da ziskouez labour ar Spered:
8. Bez' e-neus unan, dre ar Spered, gras da gomz euz furnez Doue,  
unan all, er memez Spered, gras da gomz euz an anaoudegez anezañ,
9. unan all, er memez Spered atao, , e-neus donezon ar feiz,  
pe c'hoaz, dre ar Spered-se n'eus nemetañ, donezonou evid paraa,
10. pe evid ober burzudou pe 'vid prezeg a-berz Doue,

- pe 'vid anaoud ar sperejou mad diouz ar re 'fall,  
 pe 'vid komz e yezou a beb seurd, pe 'vid diskleria ar yezou-se.
11. Oll eo an donezonou-se labour ar memez Spered, ha n'eus nemetañ:  
 ingala (pe: ranna) 'ra anezo etre an dud,  
 o rei da bep hini e lod e-giz ma fell dezañ (pe: evel ma kar).

\*\*\*\*\*

ALLELUIA.- .... (ad libitum)

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (2/1-12)

1. En amzer-se, ez eus bet grêt eun eured e Kana Bro-Halilea,  
 ha mamm Jezuz a oa eno.
2. Pedet eo bet Jezuz ive, hag e ziskibien gantañ.
3. Deut ar gwin da vankoud, mamm Jezuz a lavar dezañ:  
 "N'o deus mui a win."
4. Jezuz a respont dezi: "Petra 'ra an dra-ze din ha deoh, maouez?  
 N'eo ket deuet c'hoaz va eur."
5. E vamm, neuze, a lavar d'ar zervicherien:  
 "Grit kement tra a lavaro deoh."
6. Podou mein a oa eno, c'hweh anezo,  
 evid ar Juzevien d'en em walhi hervez al Lezenn,  
 hag e pep hini ez ee daou pe dri vuzuliad (pe: wardro 100 litrad).
7. Jezuz a lavar dezo: "Lakit dour da garga ar podou."  
 Hag int d'o leunia 'rez ar bord.
8. Lavared a ra goudeze: "Kemerit bremañ, ha kasit d'an ostiz."  
 Ha kas a reont. (pe: da vestr ar pred)
9. An ostiz, p'e-neus tañveet an dour troet e gwin  
 heb gouzoud a beleh e teue,

- ar zervicherien o doa tennet an dour a ouie, 'vad -  
 a halv ar pried nevez d'e gaoud:
10. "An dud, emezañ, a lak atao war an daol ar gwin mad da genta,  
 ha, pa vez tommet ar pennou, an hini falloh.  
 C'hwi, er hontrol, ho peus miret ar gwin mad beteg bremañ."
11. Setu burzud kenta Jezuz, grêt gantañ e Kana Bro-Halilea;  
 diskouezet e-neus e hloar, hag e ziskibien o deus bet feiz ennañ.
12. Goudeze, e tiskenn Jezuz da gêr Gafarnaom,  
 gand e vamm, e vreudeur hag e ziskibien,  
 hag eno e chomont eun nebeud deveziou.

\*\*\*\*\*

OREZONOU AN EIL SUL ORDINAL

\*\*\*\*\*

PEDENN AN DIGOR.-

Doue oll-halloudeg ha peurbadel, mestr war draou an neñv hag an douar,  
 selaouit gand madelez pedennou ho pobl fidel,  
 ha roit d'on amzer an donezon euz ho peoh.  
 Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,\* Doue beo ganeoh ha...

WAR AR PROVOU.- Roit deom ar hras, Aotrou Doue,  
 da gemer perz en overenn-mañ gand gwir feiz ha karantez;  
 rag, beb gwech ma vez lidet ar zonz euz sakrifis ho Mab,  
 e vez adnevezet labour burzuduz or zilvidigez. Dre J.K., or Zalver.

GOUDE KOMUNIA.- Skuillit ennom, Aotrou Doue, spered ho karantez:  
 goude beza or maget gand ar memez bara euz an neñv,  
 grit deom beza unanet kenetreuzom er memez karantez.  
 Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

\*\*\*\*\*

TREDE SUL ORDINAL

Lennadenn Ia.- Goude an distro euz an harlu, pobl Israel  
a ra anaoudegez a-nevez gand Lezenn Doue, displeget  
d'an dud gand komzou beo.

PENNAD EUZ LEVR NEHEMIAZ (8/1-4a, 4-6, 8-10)

1. Da geñver gouel ar zeizved miz, pobl Israel a-bez a zo bet bodet stard  
war ar blasenn a zo dirag dor an doureier.  
Lavaret o deus d'ar skrib Esdraz digas levr lezenn Moizez,  
an hini roet gwechall da Israel gand an Aotrou Doue.
2. Ar beleg Esdraz, eta, a zigas al Lezenn dirag engroez an dud,  
gwazed ha merhed, hag an oll vugale gouest da intent.  
Bez' e oa an deiz kenta euz ar zeizved miz.
3. Esdraz a lenne diwar al levr, war ar blasenn dirag dor an doureier,  
adaleg goulou-deiz beteg krweisteiz,  
dirag ar wazed, ar merhed hag ar vugale gouest da intent;  
hag ar bobl a oa troet o diskouarn ganto da zelaou lenn al Lezenn.
4. Ar skrib Esdraz a oa en e zav war eul leurenn goad savet a-ratoz.
5. Digeri a ra al levr a-wel d'an oll, rag uhelloc'h eged ar bobl eo savet;  
ha p'e-neus digoret al levr, an oll en em lak en o zav.
6. Esdraz a lavar bennoz d'an Aotrou, an Doue meur (pe: braz),  
hag an oll, savet o daouarn ganto, a respont: Amen! Amen!  
ha kerkent e stoubnt d'adori Doue, o 'fenn d'an douar.
8. Levited a oa gand Esdraz.  
P'en deveze Esdraz lennet eur pennad euz al Lezenn,  
al levited a zisplege d'an dud, sklêr ha frêz,  
evid rei da intent mad ar pez a oa bet lennet.
9. Nehemias, gouarnour ar vro, Esdraz, beleg ha skrib (pe: sekretour),  
koulz hag al levited a oa o rei displegaduriou,  
o deus neuze diskleriet d'ar bobl:

"An deiz-mañ 'zo gouestlet d'an Aotrou, on Doue:  
na doan, na daelou!"

- rag, o klevet komzou al lezenn, an oll a oa an dour en o daoulagad.-

10. Goudeze, e lavar dezo c'hoaz:

"It d'ar gêr bremañ, debrit kig druz, evit boeson dous,  
ha kasit o lod d'ar re n'o deus netra aozet en o herz;  
rag an deiz-mañ 'zo gouestlet d'an Aotrou.  
Arabad eta beza doaniet. Levenez an Aotrou eo ho nerz."

\*\*\*\*\*

SALM 18 / 8, 9, 10, 15.- Diskan: Ho komzou, va Doue,  
..... 'Zo spered ha buhe.

8. Lezenn an Aotrou Doue 'zo peurvad: eur vammenn a vuez eo.  
Kelennadurez an Aotrou 'zo difazi: furnez a ro d'an den dizesk.
9. Gourhemennou an Aotrou 'zo reiz: levenez 'vid ar galon.  
Bolontez an Aotrou 'zo splann: sklerijenn 'vid an daoulagad.
10. Doujans an Aotrou 'zo santel: da viken e pado.  
Menoziou an Aotrou 'zo gwirionez: reiz int penn-da-benn.
15. Salo din e plijfe deoh (pe: ra blijo deoh) komzou va muzellou  
hag ar zonzou a droan em spered dirazoh,  
Aotrou Doue, va skoazeller ha va divenner.

\*\*\*\*\*

Eil Lennadenn.- Kentel an Abostol hirio: evel an izili  
e korv an den, ar gristenien, daoust pegen disheñvel  
ez int dre o donezonou, ne reont nemed unan, eur  
horv hebken, en Aotrou Krist.

PENNAD EUZ LIZER KENTA SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-GORINT (12/12-30)  
- pe, diverret: 12/12-14 ha 27.-

12. Va breudeur, lakom da skouer ar horv, a zo anezañ eur horv hebken;  
kalz a izili e-neus koulskoude, med an oll izili,  
daoust pegen niveruz int, n'eus anezo nemed eur horv.  
Evelse ivez (emañ kont gand) an Aotrou Krist.
13. Rag en eur Spered hebken om bet badezet,  
evid dond da veza, ni oll, eur horv hebken,  
koulz Juzevien ha poblou all, koulz sklavourien ha tud libr;  
oll eo bet torret deom or zehed diwar ar Spered n'eus nemetañ.
14. Sklêr eo n'eo ket grêt ar horv gand eun ezel hebken,  
med gand meur a hini.
15. Ma lavarfe an troad: "Me n'on ket an dorn,  
n'on ket eta lod euz ar horv",  
daoust da ze e vefe c'hoaz euz ar horv.
16. Ha ma teufe ar skouarn da lavared: "Me n'on ket al lagad,  
n'on ket eta lod euz ar horv",  
daoust da ze e vefe c'hoaz euz ar horv.
17. Ma ne vefe euz ar horv nemed lagad (pe: ma vefe ar horv lagad tout),  
e peleh e vefe ar hleved?  
Ma ne vefe anezañ nemed diskouarn, e peleh e vefe ar hwesa?
18. Med Doue e-neus grêt an izili ha roet e blas da bep hini er horv  
evel ma felle dezañ.

19. Ma ne vefe euz an a-bez nemed eun ezel, e peleh e vefe ar horv?
20. Med bez' ez eus meur a ezel, ha koulskoude eur horv hebken.
21. N'helle ket eta al lagad lavared d'an dorn: "N'am eus ket ezomm ahanout",  
nag ar penn kennebeud lavared d'an treid: N'am eus ket ezomm ahanoh".
22. Ouspenn a zo: an izili euz ar horv, hag a gavom-ni ar re zisterra,  
a zo ar re muia red evidom;
23. hag ar re a lakom er renk izella eo ar re a enorom ar muia.  
Evelse, an izili dizonest a vez grêt dereatoh outo;
24. On izili onest n'o deus ket ezomm a gement-se: Doue e-neus renket  
ar horv e doare da rei muioh a enor d'ar re o deus diouer,
25. evid ma ne vo dizunvaniez ebed er horv, med, er kontrol,  
evid ma vo an izili evezieg an eil e keñver egile.
26. Ha gouzanv poan a ra eun ezel? An oll izili a houzanv gantañ.  
Hag enor a zeu d'eun ezel? An oll a gemer perz en e joa.
27. Hogen, bez' ez oh korv an Aotrou Krist,  
hag izili anezañ pep hini evid e lod.
28. Darn a zo bet lakeet gand Doue en Iliz  
da genta ebestel, d'an eil prezegerien, d'an trede kelennerien;  
goudeze e teu an donezonou da ober burzudou, da barea,  
da skoazella o breudeur, da houarn, da gomz e yezou.
29. Daoust hag ez int oll ebestel, oll prezegerien, oll kelennerien,  
daoust hag oll o deus an donezonou d'ober burzudou,
30. da barea, da gomz e yezou, pe da zisplega?

\*\*\*\*\*

ALLELUIA.- Meuleudi deoh, Aotrou Krist,  
deut da brezeg deom ar helou mad.- Alleluia.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (1/1-4, ha 4/14-21)

- 1/1. Meur a hini dija a zo bet kroget da gempenn istor  
an traou a zo kemeret en on touez evel asur-mad,  
2. diwar ar pezh on eus klevet gand ar re o deus o gwelet  
abaoe ar penn kenta,  
hag a zo bet karget da brezeg komz Doue.  
3. Me, d'am zro, goude beza en em sklerijennet piz  
war beb tra adaleg ar penn kenta,  
am eus grêt va zont o skriva diouz renk  
evidoh, Aotrou enoruz Teofil,  
4. deoh da weled sklêr pegen stard eo diazezet war ar wirionez  
ar gelennadurezh ho peus bet.
- 4/14. (Goude e vadiziant) Jezuz a oa distroet da Vro-Halilea,  
nerz ar Spered ennañ,  
hag ar vrud anezhañ a rede dre ar vro a-bez.
15. Kelenn a ree en o zinagogou, hag an oll a ree e veuleudi.  
16. Setu e teu da Nazared, e-leh m'eo bet savet,  
hag ez a d'ar zinagog, evel ma oa boaz d'ober, da zeiz ar zabad;  
sevel a ra en e zav evid ober al lennadenn.  
17. Levr ar profed Izaiaz a roer dezañ;  
o veza digoret al levr, e kav ar pennad m'eo skrivet ennañ:  
18. "Spered an Aotrou 'zo warnon, ablamour m'e-neus sakret ahanon.  
19. Kaset on gantañ evid prezeg ar helou mad d'ar beorien,  
evid embann d'ar brizonidi e vint dijadennet,  
d'ar re zall e welint sklêr,  
d'ar re 'zo gwasket e vint tennet a boan,  
hag evid embann eur bloavez a hras a-berz an Aotrou."  
20. Serri a ra al levr, hen rei d'ar zervicher, hag azeza.

- An oll dud, er zinagog, a zo paret o daoulagad warnañ.  
21. Neuze e lavar dezo: "Hirio eo deut da wir evid ho tiskouarn  
ar homzou-se euz ar Skritur."

\*\*\*\*\* OREZONOU AN TREDE SUL \*\*\*\*\*

PEDENN AN DIGOR.-

Doue oll-halloudeg ha peurbadel,  
ni ho ped da veza o rén on oberou hervez ho polontez madelezuz,  
evid ma hellim beza karget a oberou mad en ano ho Mab karet,  
Or Zalver Jezuz Krist, Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan...

WAR AR PROVOU.-

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, digemer gand madelez ar provou-mañ;  
en eur skuill ho santelez enno bremaig evid o zakri,  
grit ma vezint talvouduz evid or zilvidigez.  
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

GOUDE KOMUNIA.-

Ho pedi a reom, Aotrou Doue oll-halloudeg:  
ni hag on eus bet ar hras da gaoud diganeoh eur vuez nevez,  
ra vim laouen bepred gand an donezon a roit er Zakramant.  
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

\*\*\*\*\*

PEVARE SUL ORDINAL

Lennadenn Ia. - Ar profed, karget da embann komzou Doue dirag an oll, a hell fizvoud war an nerz a resevo evid kas da benn e labour.

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED JEREMIAZ (1/4-5, 17-19)

4. Evelhenn e-neus komzet Doue ouzin:  
"Araog ma oas krouet e korv da vamm, am eus da anavezet;  
5. araog ma oas deuet war an douar, am eus sakret ahanout;  
grêt am eus ahanout eur profed evid ar poblou.
17. Neuze (ta, lak da houriz war da zargreiz, kê en da zav  
da lavared dezo kement a hourhemennin dit.  
Na gemer ket aon dirazo; anéz, me eo a ray dit krêna dirazo.
18. Setu e lakan ahanout hirio par d'eur hastell kreñv,  
d'eur pilier houarn ha d'eur voger arem,  
savet dirag ar vro a-bez, rouaned Bro-Juda hag he fennou braz,  
he beleien hag he fobl.
19. Brezel a raint dit, heb gelloud da drehi (pe: dont a-benn ouzit)  
rag me 'zo ganit evid da zavetei."  
Lavar an Aotrou eo.

\*\*\*\*\*

SALM 70 / 1-2, 3-4a, 5-6ab ha 17 - Diskan: Ho madelez a embannin, va Doue,  
..... Hag ho silvidigez 'hed an deiz.

1. En ho kichen, Aotrou Doue, e klaskan repu:  
grit ma ne droio morse da 'fall va fizians.
2. En ho madelez, va diwallit ha va zaveteit;  
selaouit ouzin ha bezit va zalver.

3. Bezit evidon eur roh-toull d'am repui, eur hastell kreñv da zalvi va buez.  
Ya, c'hwi eo va roh ha va hastell.
- 4a. Va Doue, tennit ahanon euz dorn an den a zroug.
5. C'hwi eo a hortozan, Aotrou Doue; c'hwi va esperans, Aotrou,  
adaleg va yaouankiz.
6. Warnoh on bet harpet abaoe m'emaon war an douar;  
araog m'on bet ganet, oh bet va divennour.
17. Va Doue, ganeoh on bet kelennet pa oan yaouank,  
ha beteg-henn n'on ket ehanet da vruda hoh oberou burzuduz.

\*\*\*\*\*

Eil Lennadenn. - Kaoud donezonou roet gand Doue a zo kaer,  
eme an Abostol; med n'eus donezon ebed hag a dal-  
vezfe netra heb ar garantez. Ha setu sant Paol  
o liva deom eun daolenn dispar euz ar garantez.

PENNAD EUZ LIZER KENTA SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-GORINT. (12/31- 13/13)

- 12/31. Va breudeur, e-touez donezonou Doue e hoantait kaoud ar re wella.  
Hag emaon c'hoaz o vond da ziskouez deoh eun hent dispar dreist  
ar re all.
- 13/1. Ha goude ma ouifen komz yezou an dud, ha re an êlez zoken,  
ma n'am eus ket ar garantez,  
n'on nemed arem o seni pe simbalenn o tregerni.
2. Ha goude m'am befe gras da brezeg,  
goude m'anavezfen oll visteriou Doue hag e ouiziegez penn-da-benn,  
goude m'am befe feiz euz ar starta, beteg diblas ar menezioù,  
ma n'am eus ket ar garantez, n'on netra.
3. Ha goude ma rofen va oll vadou en aluzenn,  
pe ma taolfen va horv en tan da zevi,  
ma n'am eus ket ar garantez, ne dalvez din da netra.

4. Ar garantez a oar gouzañv ha gortoz, troet eo da ober vad,  
ar garantez a zo heb avi; ar garantez n'en em veul ket,  
n'eo ket c'hwezet gand an ourgouill;
5. ne ra ket troiou vil, ne glask ket he mad heh-unan,  
n'eo ket buan da daeri (pe: ne da ket e kounnar),  
ne zalh ket kont euz an droug;
6. ne gemer ket he flijadur (pe: ne vourr ket) o weled ober gaou da zen,  
med joa he deus gand ar wirionez;
7. peb tra a houzañv, peb tra a gred, peb tra a esper, peb tra a hortoz.
8. Ar garantez morse n'eus diskar ebed dezi.  
Kemerit an donezon a brezeger: dond a raio da veza heb implij,  
pe hini ar yezou: ehana 'raio,  
pe hini ar ouiziegez a Zoue: ne vo mui ezomm anezi.
9. Rag eul lodig hebken a hellom bremañ gouzoud diwarbenn Doue,  
eul lodig hebken a hellom prezeg;
10. Setu, pa vo digouezet ar pez a zo klok ha peurechu,  
ar pez a zo diglok (pe: dibarfet) ne zervicho mui.
11. Evelse, pa oan bugel (pe: krouadur), evel eur bugel e komzen,  
evel eur bugel e sonjen, evel eur bugel e komprenen;  
med, pa 'z on deut d'an oad gour,  
am eus dilezet ar pez a oa euz ar bugel ennon.
12. Bremañ e welom a-dreuz eur mellezour, en eun doare amsklêr;  
med neuze e welim war eeun.  
Bremañ eh anavezad war lodenn, meuze eh anavezin Doue ervad,  
evel ma 'z on bet anavezad gantañ.
13. Bremañ e chom ar feiz, an esperans, ar garantez, o zeir;  
med an hini vrasa anezo eo ar garantez.

\*\*\*\*\*

\*\*\* Ma 'z eus leh da ziverra, kregi er bajenn-mañ, gwerzad 4.

ALLELUIA. - Meuleudi deoh, Aotrou Krist! Meuleudi deoh, sklerijenn ar bed!

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (4/21-30)

- E sinagog Nazared, goude beza lennet levr ar profed Izaiaz,
21. Jezuz a lavar d'an dud: "Hirio eo deut da wir evid ho tiskouarn  
ar homzou-se euz ar Skritur."
  22. An oll a rente testeni dezañ, ha bamet e oant  
gand ar homzou leun a hras a zeue euz e ginou,  
hag e lavarent: "Ha n'eo ket hemañ mab Jozef?"
  23. Jezuz a lavar dezo: "Moarvad emaoch o vond da lavared din  
ar hrennlavar: Medisin, roit ar pare deoh hoh-unan!  
Klevet on eus pebez traou kaer ho peus grêt e Kafarnaom:  
grit kement all amañ en ho pro."
  24. Lavared a ra ouspenn: "E gwirionez, m'hen lavar deoh,  
profed ebed ne vez digemeret mad en e vro."
  25. E gwirionez, m'hen lavar deoh, kalz intañvezad a oa e bro Israel  
pa veve Eliaz, pa 'z eo chomet kloz an oabl tri bloaz hanter,  
hag eur gernez vraz e peb leh.
  26. Ha n'eo bet kaset Eliaz daved nikun anezo,  
med d'eun intañvez estren, euz kêr Sarepta e Bro Zidon.
  27. Ha kalz tud lor a oa en Israel pa veve Elizê,  
ha koulskoude nikun anezo n'eo bet pareet,  
med Naaman, eur Siriad.
  28. Oll er zinagog ez eont e kounnar, o klevet ar homzou-se.
  29. Sevel a reont, ha bounta anezañ er-mêz euz kêr, kas a reont anezañ  
beteg penn eun tarroz euz ar menez m'eo savet kêr warnañ,  
evid e stlepel (pe: e stlapa) d'an traoñ.
  30. Med Jezuz a zo tremenet en o zouez, hag eet gand e hent.

OREZONOU AR PEVARE SULPEDENN AN DIGOR.- Pedom Doue...

Grit deom, Aotrou Doue, enori ahanoh gand oll nerz on ene,  
 ha kared an oll dud ablamour deoh.  
 Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,\* Doue beo...

WAR AR PROVOU.-

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, kemer diganeom, ho servicherien,  
 ar provou a zigasom amañ war an aoter,  
 deoh da ober anezo sakramant or zilvidigez.  
 Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

GOUDE KOMUNIA.- Pedom oll a-unan...

Ho pedi a reom, Aotrou Doue, goude m'om bet maget  
 gand sakramant or zilvidigez:  
 dre ar zikour a zigas d'an dud evid ar vuez peurbaduz,  
 grit ma 'z ay ar gwir feiz atao war gresk.  
 Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

\*\*\*\*\* Testenn latin \*\*\*\*\*

- 1) Concede nobis, Domine Deus noster, ut te tota mente veneremur,  
 et omnes homines rationabili diligamus affectu.
- 2) Altaribus tuis, Domine, munera nostrae servitutis inferimus, quae,  
 placatus assumens, sacramentum nostrae redemptionis efficias.
- 3) Redemptionis nostrae munere vegetati, quaesumus, Domine,  
 ut hoc perpetuae salutis auxilio fides semper vera proficiat.

\*\*\*\*\*

Lennadenn Ia.- Galvet gand Doue da brezeg en e ano, an den  
 en em gav dister, med lavared a ra: Ya!

PENNAUD EUZ LEVR AR PROFED IZAIAS (6/1-2a, 3-8)

1. Er bloavezh ma oa maro ar roue Oziaz, am eus gwelet an Aotrou Doue  
 azezet war eur gador uhel-kenañ,  
 plegou e vantell o karga an templ.
- 2a. Serafined a oa en o zav en e gichen,
3. hag e savent o mouez da lavared an eil d'egile:  
 "Santel, santel, santel an Aotrou, mestr ar bed;  
 leun eo gand e hloar an douar a-bez."
4. Ken kreñv e oa o han, ma kréne an noriou war o marhou,  
 hag an ti 'zo bet karget gand ar maged.
5. Lavaret am eus-me: "Gwaz a-ze din! Echu eo ganin.(pe: kollet on!)  
 rag eun den muzellou saotret on-me,  
 o chom e-kreiz eur bobl muzellou saotret,  
 hag ar roue, mestr ar bed, am eus gwelet gand va daoulagad!"
6. Nijet e-neus d'am haoud unan euz ar zerafined,  
 gantañ en e zorn eur hlaouenn ruz,  
 e-noa kemeret gand geveliou war an aoter.
7. Tostaad a ra anezi ouz va ginou, ha lavared din:  
 "Bremañ, p'e-neus an dra-mañ touchet da vuzellou,  
 n'out mui saotret, da behed a zo pardonet."
8. Neuze am eus klevet mouez an Aotrou Doue o lavared:  
 "Piou a gasim? Piou a yelo euz or perz?  
 Ha me da respont: "Setu me, kasit ahanon."

\*\*\*\*\*

SALM 137 /1-2a, 2bc-3, 4-5, 7c-8.-

Diskan: Mil bennoz deoh, Aotrou Doue,  
..... Santel ha mad, nerz va ene.

1. Bennoz a lavaran deoh, Aotrou Doue, a greiz va halon,  
ablâmour m'ho peus selaouet va homzou;  
dirag an êlez e kanan ho meuleudi;  
2a stoui 'ran d'an douar dirag ho ti santel.
- 2bc Bennoz a lavaran deoh evid ho madelez hag ho fealded d'ho kër,  
rag grêt ho peus evidom en tu all d'ho promesa.
3. P'am eus ho pedet, ho peus va zelaouet;  
kresket ho peus an nerz em halon.
4. Bennoz a lavar deoh oll rouaned an douar,  
kerkent ha m'o deus klevet ho promesaou;
5. meuli a reont an heñchou a gemer an Aotrou,  
en eur lavared: "Braz eo gloar an Aotrou Doue".
- 7c. Astenn a rit ho torn, Aotrou, evid va zavetei.
8. An Aotrou Doue a gaso da benn e vadoberou evidon.  
Aotrou Doue, ho madelez n'eus fin ebed dezi;  
rag-se, na zilezit ket an neb a zo labour ho taouarn.

\*\*\*\*\*

EilLennadenn.- Klevom an Abostol o poueza war ar wirionez a zo  
ar starta diazez d'or feiz: Jezuz Krist a zo bet maro  
hag a zo savet beo euz ar bez.

PENNAD EUZ LIZER KENTA SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-GORINT (15/1-11)

1. Va breudeur, bremañ am eus da zisplega deoh an Aviel  
am eus prezeget deoh, ho peus digemeret, hag a zalhi dezañ;

2. dre an Aviel-se e viot saveteet,  
gand ma virot anezañ evel m'am eus e brezeget deoh;  
a-hend-all, eo en aner (pe: heb gounid ebed) ho pefe kredet.
3. Ar pezh am eus desket deoh araog peb tra, hag am eus-me desket va-unan,  
eo kement-mañ: ar Zalver (pe: an Aotrou Krist)  
a zo bet marvet evid or pehejou, evel ma oa lavaret er Skrituriou;
4. laket eo bet er bez, ha d'an trede deiz eo adsavet da veo,  
evel ma oa lavaret ivez er Skrituriou;
5. en em ziskouezet eo da Ber, ha goude d'an Daouzeg.
6. War-lerh eo bet gwelet gand ouspenn pemp kant a vreudeur war-eun-dro,  
a zo beo c'hoaz an darn vuia anezo, med lod a zo maro.
7. Goudeze eo bet gwelet gand Jakez, ha goude gand an oll Ebestel.
8. Da ziweza toud, eo en em ziskouezet din, evel d'ar paour-kêz kollidig.  
----- Amañ e heller krenna ar gw. 9 ha 10 -----
9. Rag an disterra on euz an Ebestel;  
n'on ket din zoken da veza anvet Abostol,  
o veza m'am eus gwallgaset Iliz Doue.
10. Med dre hrâs Doue eo ez on ar pezh ma 'z on,  
hag e hras ennon n'eo ket chomet difrouez, pell ahano:  
muioh egeto oll am eus lakeet va foan,  
n'eo ket me eo, avad, med gras Doue ganin.  
----- Amañ e kemerer adarre, ma vez bet krennet -----
11. Evelse 'ta, inti koulz ha me (pe: pe ve), setu ar pezh a brezegom,  
ha setu ar pezh ho peus kredet.

\*\*\*\*\*

ALLELUIA.- (ad libitum)

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (5/1-11)

1. Eun dervez, eñket (pe: gwasket) gand engroez an dud  
a 'n em starde en-dro dezañ evid klevet komzou Doue,  
Jezuz a oa war ribl lenn Jenezared.
2. Gweled a ra diou vag, diskennet ar besketêrien anezo  
evid gwalhi o rouejou.
3. O veza pignet en unan, a oa bag Simon, e houlenn digantañ  
pellaad (pe: tehoud) eun nebeudig diouz an douar;  
azezet er vag, e krog da brezeg d'ar bobl alese.
4. Echu gantañ da brezeg, Jezuz a lavar da Zimon:  
"Sko war an donvor, ha taolit ho rouejou da besketa."
5. Ha Simon da respont dezañ: "Mestr, goude beza poaniet  
penn da benn an noz, n'on eus paket netra;  
koulskoude, pa lavarit hen ober, e taolin va rouejou."
6. Kerkent ha m'o deus grêt an taol, e pakont kement a besked,  
ma 'z eo dare ar rouejou da regi (pe: da roga).
7. Ober a reont sin d'o henseurted (pe: kevelerien, pe: mignoned)  
euz ar vag all da zond d'o zikour.  
Dond a reont, hag e karger an diou vag,  
ken leun m'emañ war-nez beza goueledet (pe: mond d'ar strad).
8. O weled kement-se, Simon-Per en em strink ouz daoulin Jezuz,  
en eur lavared: "Aotrou, pellait diouzin,  
rag me n'on nemed eun den peher."
9. Evid gwir, kroget eo ar spont ennañ, hag er re oll a oa gantañ,  
o weled ar besketêrêz vurzuduz (pe: an taol-pesketa) o deus grêt.
10. Ken spontet all eo Jakez ha Yann, mibien Zebede,  
kompagnuned (pe: kenseurted, pe: kevelerien) da Zimon.  
Med Jezuz a lavar da Zimon: "Na gemer ket aon!  
hiviziken e vi pesketaer (pe: pesketour) tud."

11. Neuze, goude beza digaset o bagou d'an douar,  
ha dilezet peb tra,  
ez int eet da heul Jezuz.

\*\*\*\*\*  
OREZONOU AR PEMPED SUL  
 \*\*\*\*\*

PEDENN AN DIGOR.- Pedom Doue...

Aotrou Doue, dre ho madelez ha na skuiz morse,  
ni ho ped da veilla war ho famill;  
pa n'hell ho pugale kaoud fizians nemed e sikour ho kras,  
dalhit bepred d'o diwall diouz peb droug.  
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,\* Doue beo.ganeoh  
ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.- Amen.

WAR AR PROVOU.-

Taolit ho sellou, Aotrou Doue, war ar bara hag ar gwin-mañ,  
bet krouet ganeoh da genta evid rei nerz d'or zempladurez:  
plijet ganeoh ma teuñt da veza evidom bremañ  
sakramant ar vuez peurbaduz.  
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

GOUDE KOMUNIA.-

Aotrou Doue, ho peus grêt deom kemer on lod  
euz ar memez bara hag euz ar memez kalirad,  
or zikourit, ni ho ped, da vevañ en doare ma vim oll  
unan hebken en Aotrou Krist,  
ha ma tougim frouez evid silvidigez ar bed gand gwir levenez.  
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

\*\*\*\*\*